

- 137 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

51. MARC'H HAMON -AR JALOUS-

(follennoù 166 - 167)

Sillaouit cana me ho ped
 eur chanson nevez komposet
 Zo gret da eun den iaouank me a kred
 zo e chom e ker Babilon, va intent a red.

Deiz foar vikel en Lanhuon
 E pignas var he varc'h hamon
 en presence eur plac'h iaouank, me a kred,
 Ar plac'h er c'harie goude, va intent a red.

hag en mond hag e monnet
 o prena dei eur guenneget.
 Seitek anne a viras, me a kred,
 ar rest a lezas gati, va intent a red.

Pa voa e vond d'he c'has d'ar ger
 e voaint e foul e tepi per
 erruout eun den iaouank, me a kred
 Dilam he plac'h digantan, va intent a red.

hag en o pignat var he videt
 Petek ar pont an alleget
 eno e chomas ourset, me a kred,
 ne flache ket a hane, va intent a red.

Neuze tistroas ar plac'h
 evelen outan e komzas :
 A doare ma c'haloupac'h, me a kred,
 Woac'h arruet er guer, ma intent a ret.

Neuze tistroas ar goas
 evelen outi e komzas :
 Mar deuan do tarempret, me a kred
 Ar goas se a zelesfet, va intent a ret

- 138 -

Setu fachet an amours
Abred e kommans da c'hourdrous
Fleurissa a ra he skiant, me a kred,
A dren voa laket dezan, va intent a red.

vvvvvvvvvv

Jannet Puill, a henvik, 14 gwenver 1851

vvvvvvvvvvvvvvvvvvvv